

ADRIEN DE CARNE

BARZ AN ARVOR



*Kristen ha Breizad da virviken*

# SANT HERVE BENNIGET

Mister kristen en eun arvest



BREST

Moulez ru ar C'hastel, 4

1928

ADRIEN DE CARNE

BARZ AN ARVOR



*Kristen ha Breizad da virviken*

# SANT HERVE BENNIGET

Mister kristen en eun arvest



BREST

Moulez ru ar C'hastel, 4

—  
1928

# C'HOARIERIEN

---

SANT HERVE, manac'h ; dall eo.

SANT URFOAL, manac'h.

GUIHARAN, mevel yaouank, e ti Sant Herve.

SANT HOUARDON, eskob Leon.

SANT SAMSON, eskob Dol.

PATRIG, kloareg oc'h heulia Sant Samson.

SANT JILDAS, manac'h.

GWENNOLE, skolaer bihan.

Eur skolaer bihan.

Eur mesaerig denved.

Eur ribitaill skolaerien.

Ar Werc'hez Vari, elez ha sent eus ar baradoz.

*An dra ma a dremen e Breiz-Izel, war dro ar  
bloaz 548, goude donedigez hor Zalver. Bankou  
ha kadoriou, eun daol, war an teatr.*

---

## ARGUMENT

Les principaux épisodes de la glorieuse mission de Saint Hervé figurent dans ce mystère, notamment son rôle d'éducateur des petits enfants, l'histoire de son loup apprivoisé, la part qu'il prit au concile des évêques de Bretagne, réunis sur le sommet du Menez-Breiz, en vue de l'excommunication du tyran Konomor, roi de Cornouaille. Un imprudent s'étant moqué de la cécité de Saint Hervé, est lui-même subitement atteint de la même maladie. Saint Hervé lui rend miraculeusement la vue. Les évêques se séparent jusqu'au lendemain. Saint Houardon, évêque de Léon, reste seul avec Saint Hervé et Dieu leur accorde la faveur insigne de contempler, dans les splendeurs du Ciel ouvert, la Très Sainte Vierge Marie, les Anges et les Saints (1).

(1) Les pensées exprimées dans la leçon faite aux petits enfants, scène 5, et celles du cantique final, scène 14, sont attribuées, depuis des siècles, à Saint Hervé. Ce cantique peut être ou déclamé par Saint Hervé ou chanté par un chœur. Si on le chante, il faut adopter l'air *Ar Vretouned e Lourd*, sur lequel il a été composé.

## KENTA LODENN

*Skol Sant Herve*

I DIVIZ

HERVE, URFOAL

URFOAL

Deut eo evidomp, Herve, an deiz ma tleomp  
pellaat an eil dioc'h egile.

HERVE

Eur rann galon eo evidoun, va eontr ker.

URFOAL

Evidoun ive ; mont a rin, hirio, pell dioc'h  
aman.

HERVE

Ha da beleac'h eo ez eot ?

URFOAL

E goueled ar c'hoajou doun a zo war hon tro.  
Sevel a rin eno eun ti soul, eul lojennig paour.  
Skuiz maro oun, Herve, gand ar vuhez a dre-  
mennan etouez an dud, hag a vir ouzin da bedi  
evel a fellfe d'in. Re a drubuilhou a zo, er bed  
ma, evid an hini a blij d'ezan beza, e unan penn,  
noz deiz, dirag e Zoue. Emaoun o vont kuit,  
Herve, 'r c'henta 'r gwella.

HERVE

Ar c'helou ze a zigas d'in eun nec'hamant eus ar re boaniusa, eur glac'har à lakaio va daelon da redek. Savet hoc'h eus, va eontr ker, eur vandenn vrago bugale. Roet hoc'h eus d'ezo an deskadurez kristen ; desket o deus, diganeoc'h, da anaout, da bedi ha da garet an Aotrou Doue. C'houi zo karet ganto a greiz o c'halonou. Petra a zeuio da veza an holl baotredigou ze, goude ma viot eat kuit ?

URFOAL

Eun tad all a gavint, a drugarez Doue, eun tad gwelloc'h kalz egedoun, ha te eo, Herve, an tad se.

HERVE

Ne zilezin ket an denvedigou ze, sur eo. N'eus forz ; n'ankounac'haïnt biken o mestr Urfoal, o mestr muia karet.

URFOAL

Araok mont kuit, e roan hirio, d'it, va zi skol ha va holl skolaerien vihan. O rei a ran d'it e hano an Doue a garomp, hon daou, gant kemend a garantez. A hend all setu o tont daveomp eul lod anezo. Kavout a raint eus da herz eun digemer mat. N'oun ket nec'het an distera war gementse. Kenavo, va niz karet ; ra ziskennno warnout, Herve, bennosiou santel an Aotrou Doue.

HERVE

Ra ziskennint ive warnoc'h, va eontr karet ; kenavo ! *En em vriata a reont an eil egile. Moueziou laouen er meaz. Ar vugale a zeu.*

II DIVIZ

HERVE, AR VUGALE

HERVE

Selaout, bugaleigou ; eur c'helou bras am eus da rei d'eoc'h. Karout a reac'h, a greiz kalon, ho mestr Urfoal ?

AR VUGALE a unan

Ya, ya, a greiz kalon.

HERVE

Eat eo kuit Urfoal evit beza, mui oc'h mui pell diouzomp, tal ha tal gant an Aotrou Doue, en eul lojennig dister, e goueled ar c'hoajou doun. Poan hoc'h eus, her c'hredi a ran, da veza dispartiet digantan.

AR VUGALE a unan

Poan vras, ya, ya !

HERVE

Met an Aotrou Doue a zo bet bras e vadelez en ho kenver ; roet en deus d'eoc'h eur mestr all, ha me eo ar mestr nevez se.



AR VUGALE

Ni ho kar, mestr, ni ho kar.

HERVE

Rei a ran d'eoc'h eun diskuiz bihan, hag an aotre da c'hoari eun tammig etrezoc'h. Bremaik e roin d'eoc'h va c'hentel genta ; evid hirio ne vezo ket re hir. Eur gentelig ne vezo ken. *Herve a ya kuit ; Gwennole a zeu.*

III DIVIZ

AR VUGALE, EUR SKOLAER, GWENNOLE

GWENNOLE

Me a zo Gwennole va hano. Emaoun o klask ti-skol an aotrou Urfoal, a berz va zad, a fell d'ezan e teufen da veza skolaer er skol ze.

EUR SKOLAER

Mat ; ema ar skol ze aman, met an aotrou Urfoal zo eat kuit, hag an aotrou Herve eo a zo deut da veza hor mestr war e lerc'h. An aotrou Herve, avat, a zo ker mat ha ker karet hag an aotrou Urfoal.

GWENNOLE

Gwell a ze ; bez' ez eus evelato en ti-skol ma, traou ha ne gaver ket er skoliou all, hag a zo gouest da sponta an dud a grenn.

AR SKOLAER *souezet*

Traou hag a laka an dud da veza spontet ? Ne glevan ket, tamm ebet, ar pezh a fell d'it lavaret. D'it e vezo great ganeomp, Gwennole, eun digemer laouen eus ar re laouena ; ni a vezo evidout mignoned vat. N'az pezo ket ezomm da gaout aon, e nep giz, dirazomp.

GWENNOLE

Ne ket dirazoc'h eo, kennebeut, em bezo da gaout aon. Dirak traou all eo.

AR SKOLAER

Ha pere 'ta ?

GWENNOLE

Pa dremennen dre ar porz, n'eus nemet eur pennadig, digor e oa dor vras ar c'hraou. Mat ; petra 'm eus gwelet er c'hraou ? Eur foltrenn bleiz a zelle ouzin. E zaoulagad a lugerne benn ; e zent gwenn, en e c'hinou, a oa ken hir ha va biz bihan. *Ar vugale holl a ziroll da c'hoarzin.*

AR SKOLAER

Ha dirag ar paour keaz bleiz se eo ec'h eus bet aon ? Bez dinec'h, Gwennole ; hennez ne raio biken an distera droug na d'it, na da zen. A hend all, setu o tont davedomp Guiharan, mevel an aotrou Herve. Hennez a zisplego d'it, gwelloc'h kalz c'hoaz egedomp, doareou ar bleiz se. N'az pezo nemet selaou ar pezh a lavaro. *Guiharan a zeu.*

IV DIVIZ

AN HEVELEP RE, GUIHARAN

AR SKOLAER

Dont a rez, Guiharan, e poent hag en amzer. Setu, en hon touez, eur skolaer nevez, Gwennole. Ema o paouez kaout aon dirak hor bleiz, gwelet gantan er c'hraou.

GUIHARAN

Eur bleiz eo, e gwirionez dreist ar bleizi all. N'eus ket bet, n'eus ket ha ne vezo ket da viken eur bleiz all bennak henvel outan. Daou viz zo, pe war dro, debret en deus azen an aotrou Urfoal.

GWENNOLE *o c'hoarzin, ha, ha, ha!*

Ha neuze ? Mar en deus debret eun azen, ne ket evit se eo, a gav d'in, e ve dishenvel bras dioc'h ar bleizi all.

GUIHARAN

Va lez me 'ta, lavaret an traou penn da benn, penglaouig ma 'z out. Goude beza debret an azen, eat eo kuit en em denna er japel, ha redek a rean, me, war e lerc'h, eur forc'h houarn ganen evid hel laza. Mat ; n'em eus ket e lazet.

GWENNOLE

Na perak 'ta ?

GUIHARAN

Edo an aotrou Herve er japel, o pedi an Aotrou Doue a greiz e galon. Ar bleiz a yeas rak-tal d'her c'havout, dous ha chentil, o ficha e lost evel eur c'hi bihan. Ro d'ezan peoc'h, a lavaras d'in an aotrou Herve, ro d'ezan peoc'h. Pardonni a ran, me, d'ezan. Keuz en deus d'e dorfed. Debret en deus hon azen ; dont a ra evit kemeret e leac'h, evit labourat en e leac'h.

GWENNOLE

Biskoaz kemend all.

GUIHARAN

Ha diwar neuze, beva a ra etouez hon denved, mignon bras ganto ; dougen a ra, bemdez, seier leun a winiz d'ar vilin, ha seier leun a vleud d'ar gear. Mont a ra ganen d'ar c'hoad, da gerc'hat ar c'heuneud a lakaan war e gein. Bremaik, d'ar park, e tenno an alar evel eur marc'h, war eun tamm douar am eus da labourat.

GWENNOLE

Penaos e c'hoarvezas kemend all a draou burzudus ?

GUIHARAN

Ne ket souez. Ar zent, hag an aotrou Herve a zo unan anezo, ar zent a zo o galloud en tu all d'hor spered. Gouzout a reont ober tud vat gant torfedourien ha loened kunv gant loened kriz. Rak se, bugaleigou, karit an aotrou Herve gand eur garantez ker bras hag an hini hoc'h

eus evid ho tad. Dall eo, evel a ouzoc'h ; dall e oa o tont er bed ma. Kent a ze e tleit senti outan gwelloc'h c'hoaz eget ouz eur mestr all. Setu hen o tont d'ho lakaat da labourat, da rei d'eoc'h e genteliou fur. *Herve a zeu; Guiharan a ya kuit.*

## V DIVIZ

AR VUGALE, HERVE

HERVE

Azezit, mignonedigou, azezit war ar bankou ma. Emaoun o vont da ober ganeoc'h hol labour pemdeziek. Evid ar weach kenta eo e roan d'eoc'h eur gentel. Selaouit va c'huzuliou a berz an Aotrou Doue. Savet em eus eur gelenn nevez evidoc'h. Likiit ho poan d'he derc'hel a bez en ho spered :

« Pa zihunit en ho kwele, kinnigit ho kalon  
« d'an Aotrou Doue, grit sin ar groaz ha livirit  
« gant feiz, fizians ha karantez, livirit : Va  
« Doue, d'eoc'h e roan va c'halon, va c'horf  
« ha va ene ; ra vezin, gand ho kras, eur c'hris-  
« ten mat a zen ; paneved se, ra varvin yaouank  
« flamm. »

« Pa welit eur vnan o nijal, dalc'hit sonj ez  
« eo an drouk spered ken du ha ker fall hag hi ;  
« pa welit eur goulmig wenn o nijal, dalc'hit  
« sonj ez eo hoc'h eal mat ken dous ha ker  
« gwenn hag hi. »

« An Aotrou Doue a zell ouzoc'h, evel an  
« heol dioc'h penn uhela eus an nenvou. Doue

« eo hag ho laka da vleunia evel m'ema an heol  
« o lakaat da vleunia roz gouez ar menezioù. »  
« Dioc'h ar pardaez, araok mont d'ho kwelé,  
« livirit ho pedennou ; taolit evez mat d'o lava-  
« ret bepred, evit ma ziskenno dioc'h an nen-  
« vou eun eal gwenn hag ho tiwallo beteg ar  
« goulou deiz. »

Setu, bugaleigou karet, an tu ar gwella da ve-  
va evel kristenien vat. Grit, eta, ar pezh en em  
gav er gentel ze, hag ho puhez a vezo santel.  
Ha breman, it da c'hoari eun tammig adarre. *Ar  
vugale a ya kuit gant kriadennou laouen. Guiha-  
ran a zeu.*

## VI DIVIZ

HERVE, GUIHARAN

GUIHARAN

Emaoun o paouez gwelet, mestr, eur beacher  
a zeu etrezek ennomp. Kerzet a ra buan ; eur  
zae a vanac'h a zo warnan.

HERVE

Kea d'e ziambroug, ha lavar d'ezan, eus va  
ferz, dont aman.

GUIHARAN

N'eus ket ezomm ; setu hen o tont. *Jildas a  
zeu, eur vaz veacher gantan. Guiharan a ya kuit.*



VII DIVIZ

HERVE, JILDAS

JILDAS

Doue r'ho pinnigo, Herve. Me eo Jildas, abad e gourenezenn Ruis. Deut oun da gomz ouzoc'h diwarbenn ar gwalleuriou spontus a gouez, en amzer a vremen, war hor Breiz karet. Fellet eo bet d'in, Herve, kaout ho kuzul war gementse. Konomor, roue Kerne, o chom e kichen Karaez, a zo euzus e zoare beva. Eun den kriz ha didruez a zo ken. Ne oar nemet gwaska an nesa ha la-kaat ar gwad da redek. *Herve ha Jildas a azez.*

HERVE

N'eo ket bet fall evelse a bep amzer. Gouenou, abad, a zavas eur manati war eun tamm douar roet d'ezan gant Konomor. Diwar neuze, war a welan, deut eo da veza fall.

JILDAS

Fall eus ar re wasa. Rakse eur sonj a zavas em spered evit gwellaat an traou. Konomor a zo bras bras e garantez evit Trifina, merc'h Gwerok, kont Gwened. Mat ; Gwerok a zo va mignon a bell zo ha va gwella mignon. Mar fell d'in ober ar goulenn outan, e roio e verc'h da Gonomor. Ha neuze her c'hredi a rafen awalc'h, kalon Konomor a zeufe da deneraat gand ar garantez,

hag ar gwad, fizians am eus, a baouesfe da redek. Petra sonjit, Herve, diwarbenn ar pez a zo em spered ?

HERVE

Konomor a zo bras e c'hoant da gaout enoriou. Mar teu da zimezi gant Trifina, e vezo roue ne ket hepken war vro Gerne, met ive, divezatoe'h, war vro Wened. Levenez a zavo ennan, neuze, hag ar galon, pa vez laouen, a ya peurlies a war wellaat ha war deneraat. An traou a yafe da vad, marteze, evid hor Breiz muia karet.

JILDAS

Doue a wel e goueled hor c'halon. Hen eo, hep mar ebet, en deus roet d'in, evit mad hor bro, ar mennoz se, da lavaret eo, eureuji Konomor ha Trifina.

HERVE

Ra ziskenno warnoc'h, Jildas, gras an Aotrou Doue. Kit gand hoc'h hent, kuzuliet gand hor Zalver, ha karget eus e vennoziou.

JILDAS

Kenavo, Herve, ha mil bennoz Doue d'eoc'h. Eur paotrig a welan o tont aman. Eur bugel eus ho ti skol eo, marteze. Kenavo, Herve. *Herve ha Jildas a zav. Jildas a ya kuit. Eur mesaerigt denved a zeu. Gwisket eo gand eur c'hroc'henn maout.*

VIII DIVIZ

HERVE, AR MESAERIG

AR MESAERIG

Me a fellfe d'in komz ouz an aotrou Herve.  
E peleac'h eo e c'hellin her c'havout.

HERVE

Me eo, mignon bihan. Piou out te ha petra  
a fell d'it ?

AR MESAERIG

Me a zo Yann va hano, ha va micher eo beza  
mesaer denved. Fellet eo bet d'in ho kwelet.

HERVE

Perak'ta ?

AR MESAERIG

Evid ho trugarekaat ha rei d'eoc'h va anaou-  
degez vat, a wir galon.

HERVE

Ne glevan ket ar pezh a levez. N'out ket ana-  
vezet ganen ha n'em eus great d'it mad ebet,  
beteg hen, da vihana.

AR MESAERIG

Eo, eo ; great hoc'h eus eur mad bras d'in,  
ha n'eus ket pell, a zo gwell.

HERVE

Lavar penaos 'ta.

AR MESAERIG

Saveteet hoc'h eus, er zizun dremenet, unan  
eus va oaned ar c'haera ; her tennet hoc'h eus  
dioc'h dent eur bleiz spontus.

HERVE

Me, mignonig, me ? Penaos em bize gellet hen  
ober ? N'edon ket ganez ; pell diouzit e oan.

AR MESAERIG

N'eus forz ; p'am eus gwelet va oanig paour  
kroget gant Gwillou ar bleiz, me a zo en em  
daolet war va daoulin o lavaret ar bedennig ma :

Mar bezez Satan, ra 'zi pell en han' Doue  
Mar bezez Gwillou ra 'zi pell dre sant Herve.

Ar bleiz, neuze, a zo eat kuit, gouestadik, gou-  
de beza distaolet d'in va oanig. Ho trugarekaat  
a ran adarre.

HERVE

Ne ket d'in me eo, paotrig, ne ket d'in me  
eo e tleez rei da anaoudegez vat, met d'an Ao-  
trou Doue. Hen eo en deus distaolet d'it da  
baour keaz oanig. Ouspenn, arabad eo lavaret :  
*Ra 'zi pell dre Sant Herve.* Me ne ket eur zant  
oun ; me eo Herve ha netra ken.

AR MESAERIG

Mat ; lavaret a reomp ar pezh zo bet desket d'eomp. Kenavo ha trugarez d'eoc'h.

HERVE

Kea, bugel karet. Ra vezi benniget gand an Aotrou Doue. *Herve hag ar mesaerig a ya kuit. Samson, Houardon ha Jildas a zeu, diskabell o zri.*

---

EIL LODENN

---

*War gern ar Menez-Breiz*

IX DIVIZ

SAMSON, HOUARDON, JILDAS. *Azeza a reont o zri*

*SAMSON da Houardon*

Daoust hag hoc'h eus pedet Herve da zont en hon touez evid ar c'honsil a dle beza dalc'het aman ? Eun dra a bouez bras eo, war va mennoz, kaout ganeomp Herve, evitan da veza manac'h ha netra ken. Eur stad vras a ran anezan abalamour d'e vadelez, d'e wiziegez ha d'e zantelez dispar. N'ema ket aman, ha koulskoude, abardaezi a ra.

HOUARDON

Dont a raio, hep mar ebet ; her gwelet em eus, deac'h c'hoaz, war an hent ma 'z eer gantan beteg aman ; met, evel a ouzoc'h, dall eo hag ar bale, evid ar re zall, a zo diesoc'h kalz eget evidomp. Ema en hent ; en em gavo dizale en hon touez, fizians am eus.

SAMSON

Da c'hortoz Herve da zont, goulenn a ran diganeoc'h hag hen e kavit mat e komzfemp etrezomp diwarbenn an traou doanuis a ra kemend a boan d'hor c'halon. Konomor a zo, war a leverer, gwasoc'h c'hoaz eget ne oa' bet beteg hen.

JILDAS

Re wir, aotrou 'n eskob, re wir eo an dra ze. Hen a oa birvidik bras e garantez evit Trifina, mere'h Gwerok, kont Gwened. Kredi a rean e vije gwellaet e galon mar gellfed rei d'ezan da bried ar plac'h yaouank vat ha kaer ze. Goulennet em boa, neuze, digant Gwerok, hag a zo va brasa mignon, e asant evid an eureud se. Kredet em boa e paouezfe goudeze ar gwad da redek. Epad eur pennad mat a amzer goude an eureud, an traou a droas da vad ; met ne badas ket an doareou mat se. Krena a reer dirak krisder euzus an den ze. C'houi a anavez mat roll spontus e dorfejou. Lazet en deus Trifina, e baour keaz greg. Doue, gwir eo, en deus great neuze eur burzud dispar en e c'henver, ouz he lakaat da zével a varo da veo. N'eus forz, Breiz a bez a skrij gand eur gounnar zantel a enep

da Gonemor. Goulenn a ra ma vo kastizet an torfedour spontus se.

HOUARDON

A hend all, ne ket hepken maro Trifina eo e ve da rebechat d'ezan. Re all a zo bet lazet gantan, re all stlapet er prizon, re all laeret ho madou diganto. Pa vez, en Iliz santel hor Zalver, eun ezel brein, n'hon eus ken tra da ober nemet e drouc'ha. *Patrig a zeu.*

X DIVIZ

AN HEVELEP RE, PATRIG

*Patrig da Zamson*

Eur manac'h a welan duhont, aotrou 'n eskob. Gwisket fall eo, gand eur zae goz ha dister; dont a ra davedomp.

SAMSON, *o sellet ouz ar meaz*

Kit d'her c'herc'hat, ha livirit d'ezan dont aman. *Patrig a ya hag a zeu dioc'htu en dro, Herve gantan.*

XI DIVIZ

AN HEVELEP RE, HERVE

SAMSON

Doze r'ho pinnigo, Herve. Edomp war c'hed ac'hanc'h. Plijadur vras hon eus ouz ho kwelet.

PATRIG *faeüs*

Ne ket re abred eo. Kollet hon eus hon amzer gand al lean ze. Pell 'zo m'emaomp d'az kedal, manac'hig dall. *An holl a zav.*

HERVE

Goab a rit eus va dallentez; ne ouzoc'h ket, neuze, omp bet great evel ma 'z omp gand an Aotrou Doue hen e unan? E rankomp hen trugarekaat evit pep tra.

SAMSON

Gwir eo ar pezh a lavar Herve, ha c'houi, Patrig, ne ket gwall drugarezus ho kalon.

JILDAS

Ho penn a zo skanv; n'ouzoc'h ket diskouez ar vadelez dleet da unan eus ho preudeur, dreist holl mar en deus diouer eus ar gweled.

HOUARDON

Ankounac'heat hoc'h eus 'ta, eo doujans an Aotrou Doue penn kenta ar furnez. Neb a ra goab a hell beza skoet gand Doue.

PATRIG *ema o vont da goueza a dreuskil; dalc'het eo gand ar re all. Leuskel a ra eur griadenn spontus.*

Ha! skoet oun evel hel livirit; skoet oun gand Doue. R'en devezo truez ouzin! Kollet em eus va gweled en eun tao! *Patrig en em strink war e zaoulin.*

SAMSON

Spontus eo ar c'hastiz o tont a berz Doue. Her goulenn start a reomp diganeoc'h, Herve; pedit an Aotrou Doue evid an den reuzeudik se.

JILDAS

Doue a zelaouo ho pedennou.

HOUARDON

Rei a raio d'eoc'h ar pezh a c'houlennot digantan.

HERVE

Pedomp holl a unan evit lakaat da ziskenn truez hor Zalver war e zervicher Patrig, ha digasit d'in eur banne dour a vezo benniget gand an eskibien.

SAMSON

Dour eo a fell d'eoc'h kaout, Herve? Penaos e c'hellfed kaout dour war gern seac'h ar Menez-Breiz?

HERVE

Netra n'eo diez d'an Hini a hell ober pep tra. En em strinka a ra war e zaoulin; pedi a ra epad eur pennadig. Sevel a ra. Ober a ra eur groaz gant e vaz war an douar hag e lavar: Sellit aze, en han' Doue. Eur vammenn a zav.

AN HOLL a unan

Burzud! burzud! Setu dour kaset gant an Aotrou Doue!

HOUARDON ha SAMSON a unan, o venniga an dour

Bez benniget, dour kaer ha glan, en hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel. Rei a reer da Herve eur bannig eus an dour; gwalc'hi a ra, gantan, e zaoulagad da Batrig en eur lavaret: Bezit pareet, Patrig; ra zeuio ho kweled en dro en ho taoulagad, en hano an Aotrou Doue! Patrig a zav.

PATRIG o krena gand al levenez

Gwelet a ran! gwelet a ran! Doue madele-zus, pardonit d'in va fec'hed. D'eoc'h ha da Herve, ho servicher santel, e kinnigan va anaoudegez vat.

SAMSON

Ha breman, Patrig, kit pelloc'h, eun tammig, da beurober, war ho taoulin, ho trugarez e kenver an Aotrou Doue. Houardon, Herve, Jildas ha me, hon eus da reiza etrezomp traou eus ar re bouezusa. Patrig a ya kuit.

## XII DIVIZ

SAMSON, HOUARDON, HERVE, JILDAS  
Azeza a reont o fevar ouz an daol

SAMSON

Gouzout a rit, Herve, eun dra bennak, da vihana, eus an traou poanius meurbet hon eus da gomz diwar o fenn. Konomor ne ket eun danvad diank eo ez eo, met eun danvad kollet,

nemet na rafe an Aotrou Doue eur burzud en e genver.

HERVE

Klevet em eus ar c'helou glac'harus se, aotrou 'n eskob, digant va eskob Houardon ha digant Jildas. Me a zo bet bras va rann galon. Ne jom ket ganen fizians ebet da welet an ene aheurtet se o tistrei ouz Doue.

JILDAS

N'hon eus ken tra da ober, neuze, nemet rei da Vreiz a bez eur skouer vras, pegen doanius bennak ma vezo evidomp hen ober.

HOUARDON

Ar skouer ze a zo red evid hor bro garet hag evit mad hor mamm an Iliz santel. Red eo kas kuit Konomor eus a renk ar gristenien.

SAMSON

Gouzout mat a rit, kerkouls ha me, n'eus, evid an dra ze, en hor galloud, nemet eun tu, an eskumunugenn.

JILDAS

Her gouzout a reomp, allaz ! met e tleomp stlapa warnan ar c'hastiz euzus se. Hon dlead eo, dirag hor c'houstians ha dirak Doue.

SAMSON

N'hellimp ket hen ober hirio ; re zivezat eo. Met warc'hoaz, pa zavo an heol, en em gavimp

holl aman. Dioc'h kern ar Menez-Breiz, hor mouez a yelo bete goueled ar vro da zougen ar varn en hano an Dreinded sakr.

HOUARDON

Me avat, a fell d'in araog an noz, chom aman gand Herve ; traou am eus da lavaret d'ezan. *Samson ha Jildas a ya kuit.*

XIII DIVIZ

HOUARDON, HERVE

HOUARDON

Abaoe pell amzer, Herve, eur c'hoant am eus diwar ho penn. Meur a weach em eus diskleriet d'eoc'h ar c'hoant se. Hirio c'hoaz hel lavaran d'eoc'h, hag ho pedi a ran a greiz kalon. Me a fellfe d'in e vefe digemeret ganeoc'h ar garg a veleg. Laouen e vefen o rei d'eoc'h ar velegiez, pa ne ve nemet abalamour d'ho santelez.

HERVE

Re bounner e ve, aotrou 'n eskob, ar garg dispar ze evidoun. Goulennet em eus, ez yaouank, digant Doue, ar c'hras da jom bihan ha dister bete ma varvin. N'oun mat ha ne vezin biken mat, en urziou sakr, nemet da gas kuit an diaoulou, da ziboania an dud paour ankeniet gand an drouk spered. An urziou all a ve re gaer, re uhel, kalz, evidoun. Ne fello biken d'in o digemeret.

HOUARDON

Ho pedi a ran a nevez, Herve. Me a ve dispar va flijadur mar plijfe d'eoc'h rei d'in va goulenn.

HERVE

Daoust d'ar zentidigez a dlean d'an hini a zo va eskob, me ho ped, gand ar vrasa doujans, da lezel ho servicher paour en e stad izel a vanac'h. Bolontez Doue eo.

HOUARDON

Mar d-eo ar pezh a blij da Zoue, war ho mennoz, ho kredi a rankan, peger bras bennak ma vezo va glac'har. Euruz oc'h, Herve; evidoc'h da veza dall, gwelet a rit, her gouzout a ran, gwelet a rit, awechou, gant daoulagd hoc'h ene, traou dudius ar baradoz. Gwelet a rit an nenvou digor o tiskouez d'eoc'h o burzudou dispar. Allaz! goulennet em eus en aner, me, meur a weach, digand an Aotrou Doue, ar c'hras da gaout ar weledigez se en ho kichen. Daoust ha n'hellfen ket he c'haout drezoc'h, pa ne ve nemet eur weach hepken?

HERVE

Pedomp hon daou an Aotrou Doue; mar fell d'ezan, rei a raio d'eomp ar blijadur ze, ha n'en deus ket he far war an douar paour ma. An daou zant a gouez war o daoulin, unan a zehou, egile a gleiz. Eur gouel a zigor. Ar baradoz en em ziskouez gand ar Werc'hez, ar zent, ar verzerien, ar gwerc'hezed, an elez, hag all, d'indan eur sklerijenn eus ar re skedusa, mar gellit he c'haout war an teatr.

XIV DIVIZ

# KANAOUENN AR BARADOZ DIGOR

*War don Ar Vretouned e Lourd*

Dor aour an nenv, dor va bro garet  
 En em zigor frank d'am digemeret. 2 w. (1)

Paradoz santel! Na me 've laouen  
 O pignat ennout, 'vel eur goulmig wenn. 2 w.

Pebez eurusted! an Tad a welan,  
 E Vab benniget hag ar Spered Glan! 2 w.

Ar Werc'hez a zo, ouz he c'hurunenn  
 O steredenni daouzek sterenn. 2 w.

Elez, arc'helez, en ho kanaouenn  
 Meulit hon Doue gant peb a delenn. 2 w.

Ped a werc'hezed, ped a zantezed  
 Gant Roue an nenv holl bet kurunet. 2 w.

Va breudeur, va zud, va zad ha va mamm  
 A welan, skedus, holl, ha yaouank flamm. 2 w.

Gournijal a ra, war o zro, elez  
 Flouroc'h kalz eget ar rozenn nevez. 2 w.

'Velse ar gwenan a gar an ebat.  
 En eur park bleuniet ha leun a c'houez vat. 2 w.

Kened hep he far, evid hor spered!  
 Seul vui m'oc'h gwelet, seul vui m'oc'h karet!  
 2 w.

*Ar gouel a ziskenn*

(1) Peb eil gwerzenn a dle beza kanet diou weach.